

# SKRIVADENN AN EMGLEV

D'ar Sadorn 6 a viz Meurzh 2004

## Ar fest-noz

Dañsal a blij d'an dud, d'ar re vras ha d'ar re vihan, d'ar re gozh ha d'ar re yaouank. Bep Sadorn e vez ur fest-noz pe ziv er c'hornad. Ne goust ket ker mont e-barzh, pemp pe c'hwec'h euro d'ar muiañ, ha plijadur a vez atav.

*Fin skrivadenn ar CE*

.....

Erru eo ar sonerion. Ur strollad bras a zo an noz-mañ : "Friko-kaol" eo anv ar baotred-se. Kanerezed a zo ivez, ar "Botoù Ruz", seizh plac'h laouen hag a oar an ton hag ar son ! Sonerion daou-ha-daou a zo c'hoazh, bombard ha binioù kozh.

*Fin skrivadenn ar CM*

.....

Dek eur eo bremañ. Gavotenn, fisel, polka, hanterdro, plinn a zo bet. Lod ag an dañserion a zo erru skuizh o divhar. Ur banne a raio vad ! Krog e oa an davarnerion da gavout hir o amzer just a-walc'h. labour o deus bremañ, labour a-vil-vern.

*Fin skrivadenn ar skolaj*

.....

Un eur vintin. Skuizh-poazh eo an davarnerion Sul. Sav a zo bet kavet d'an dour, d'ar bier ha d'ar chistr. Ne chom mui netra pe-dost. Gwell a se, mont a raio holl an argant dastumet da "Radio Pil-Beg", ur radio e brezhoneg.

Krampouezh ne chom ket mui kennebeut ! Tamm krampouezhenn ebet, na banne chistr ebet ?

Geo, en un tu bennak sur a-walc'h, met miret int evit ar sonerion !

*Fin skrivadenn lise/oadourion*